

FALLENTEZ
AR P.T.T.

POBL VREIZH

4^l

NIV. 109
C'HWEVRER
1979

**AN UDB
E KENDALC'H
AR PSA
E SEVILHA**

**FALL AR JEU
• GANT AN ELEKTRONIK
E BREIZH**



Gernot

**HARPIT
POBL VREIZH**
KRP 2746-79 ROAZON
CCP RENNES

10* listennad

J. Limon, Paris (75)	10.00L
M. Gouez, Kastell	20.00L
D. Gaudou, Plober	20.00L
K. Greg, Perros	10.00L
B. Le Lou, Lannou	20.00L
Daniel L.C., Allare	20.00L
J. Louer, Konk-Kenn	20.00L
H. Anquer, Naoned	20.00L
Dishaw, Breizh-Veur	35.00L
Christan G., Lamballe	20.00L
Y. Skoc, Douarnenez	20.00L
P. Fourel, Brest	20.00L
J.F. Guenziog, Brest	20.00L
Komite-stal BNP, Brest	40.00L
J.A. Ar Go, Ar Yaou	20.00L
Arnold C.	20.00L
Chambriy-les-Tours (37)	20.00L
J.P. Olivo, Tis	20.00L
M. Konk, Ploign	40.00L
D. Niot, Angers (49)	10.00L
N. Rey, Nimes (30)	10.00L
P. Gales, Kemper	70.00L
Y.V. Richard, Creteil (94)	20.00L
Fañch B., Kombid	20.00L
M. Gorge, Naoed	20.00L
M.J. Rousset, An Oriant	20.00L
B. Leguy, Cyoaing (59)	20.00L
Dishaw, Lokmaria-Berrien	30.00L
H. Latimer, Landrevezeg	20.00L
P.H. Prunet, Tregon	30.00L
L. Cevear, An Ospital	20.00L
Joel Le J., Paris (75)	30.00L
P. Maugne, Bro-Suss	10.00L
P. Kombit, Montroules	70.00L
S. Marchal	20.00L
Levallois-Perret (92)	20.00L
A. Hamon, Ploegoumou	20.00L
835.00L	
Diwar al listennadou all	5371.00L
War-un-dro	6206.00L

setu bet roet da b'Pobl Vreizh, en ur ober 10 mis, ouzhpenn 6000.00L : ur burzhud, e gwirionez. Red eo dimp lavaret deoc'h un vech ouzhpenn, leonenn ha komantanteran ger, kement-mañ : ganeoc'h-c'hwiz eo e chom Pobl Vreizh en e sav. Ganeoc'h-c'hwiz, va, na ne c'hellomp ket fizoal re war ar paperennou-bruderezh : n'int ket stank, ar stekou a gass arc'hant d' b'Pobl Vreizh ma vo gwraet bruderezh warni ewite, n'int ket vo gwraet bruderezh warni ewite, n'int ket stank, ha ne sav ket gwall uhel ar beneg moneiz a zeu diwar ar c'hoari-se. Hon gwellañ harperon, hag a bell, eo hon lenne-ron hag hon komantanteran.

Fiziañs hon eus ne 'z it ket skuizh o weled ahanomp o larad deoc'h beb mis ar memes genou : rugarez, mersi, ahaoudagezh vad, pour hemennou, meuiad.

Fiziañs hun eus memestra e kresko c'hoazh niver hon madobourion, rag anad eo deoc'h e vez ezomm beb mis un donnad brav a arc'hant ewid lakad da zont er maes un niverenn eus Pobl Vreizh, ma poaniañ d'ne fichañ ha d'ne c'hempenn gwelikañ ma c'hellomp.

Pobl Vreizh

KOMANANTOU

boutin : 40 L	V
P skoaz : 60 L	R
O pe ouzhpenn	E
B KRP ROAZON	I
L 2746-79	Z
C.C.P. RENNES	H

Ti-Moullerezh « Iroise »
29219 Releg-Kerhuon
Rener ar galouerien
Fañch Morvanou C.P.P.A. 50 091
1700 skwerren

Komantanter d'ar galouerien bolitikel nemet e brezhoneg pinn da benn

Pobl Vreizh (service abonnements *)

BP 304 - 29273 BREST-CEDEX

Hanw hag hanw-badez

Chomlec'h

e gass e gomanant
Boutin : 40 L (1)
Skoaz : 60 L pe ouzhpenn (1)
Estrenvro : 60 L (1)
(1) Divreket ar gaset na servijont ket

Amañ an arc'hant dre chekenn-bost (1) dre vandat-lizher (1) dre chekenn-vank (1) CCP RENNES 2746-79

* da verkañ dre red war ho kolo-lizher

**MEETING
BRAS
EN ORIENT**

D'ar sadorn 24 a vis C'hwevrer, a-benn teir sizhun ahann, e vo dalc'het UR MEETING BRAS e kêr AN ORIENT.

Ged an UDB ema bet savet an traoù...

Mall eo digouskiñ, mard omp kousket. Mall eo digoriñ an daoulagad, mard emaint serret genimp : ne ya ket mad an traoù e Breizh tamm ebet. Ema labourision hor bro e paeiñ ker ar politikerezh renet diar e c'houst ged Giscard, Barre ha kensorted. Ema an dilabour é kreskiñ bemdez en hor bro. Er maes ag hor bro iwe, gwir eo, mes en hor bro memestra. Amañ e Breizh eh omp é cham, amañ eo ema red dimp ober bec'h, amañ eo en hor bro Breizh e vennomp bewiñ, labourad ha boud mestr é an traoù.

D'ar 24/2/79 e vo e-leizh a Vretoned é vanifestiñ é ruiou an Oriant : da 4 eur goude merenn e krogo an traoù, hag érlerc'h ar vanifestadeg-se e vo gwraet ar meeting bras e Pales ar Kongressou.

An eilved meeting savet ged an UDB e vo heni An Oriant. An heni kentañ a oa bet dalc'het d'ar 25/2/78 e kêr Roazon, ma oa daet ouzhpenn 2000 a dud.

Muioc'h c'hoazh eh omp é c'hor-tos en Oriant.

Red mad eo dimp huchal a vovezh uhel ne vennomp ket bout flastret ged ar sistem brein a laka al labourision hag ar broioù sujet edan treid paotred an argant.

Venniñ a raomp boud dishual en hor bro : labour e Breizh !

Ar-un-dro e vo aprestet ar c'hampagn ewid ar mouezherezh-kanton : boud e vo etre 40 ha 45 a gandidated UDB é ar renk. Un esperañs ewid Breizh ! Red e vo dimp-ni roiñ sikour dehe.

Un dewezh bras e vo heni An Oriant.

DAIT OLL D'AN ORIENT D'AR SADORN 24/2 GOUDE MERENN ! LARIT D'HO KAMARADEB LABOUR DONED AR-UN-DRO GENOC'H !



« Bro-Dreger a fell dezri bewañ... Hag iwe Bro-Garnew, ha Bro-Gwened, ha kam-bro Sant-Nazer... Breizh a-bezh a fell dezi bewañ ! Ma n'eus ket labour en hon bro, da belec'h ez amp da glask ? Lec'h all ema heñvel an traoù : trawalc'h e vez komzet dimp eus kudennou al Loren... Neuse labour d'an oll, en o bro. Labour da Lorenis en o bro, labour d'ar Vretoned en o bro. Hag ewid kaoud labour en hon bro, eo red dimp bezañ mestr en hon bro.

AN ELEKTRONIK O TILOJAÑ ?

E penn kentañ ar bloaz newez, zo bet dalc'het un dewezh bras a stourm gant micherourien an usinou elektronik.

Gallwet e oant bet da vanifestiñ gant ar sindikajou CGT ha CFDT. Kaos zo e vo skarzhet er-maes 5000 den eus an Elektronik er Frans a-bezh. Da heul ar c'helou fall se, ez eo nec'het bras ar 15000 den a zo en usinou elektronik Breizh. Manifestadegoù a zo bet e Brest, Montroules, Gwengamp, Lannuon, Redon ha Roazon.

Herwez ar CGT hag ar CFDT, e ya fall an traoù gant an Elektronik, abalamour n'o deus klasket ar renerien hag ar bolitikerien sevel usinou en Breizh, usinou gouest da broduiñ traoù o hunan pe da glask ha da ijinañ traoù newez. Ar pezh a rebech ar sindikajou iwe eo ema pell diouzh Breizh an « usin-vamm », pe an « firmer ». Diwar skwer ar botouler e Faugères, ha diwar heni an telefon e Breizh e weler pegen dahjerus eo ar « mono-industri ».

Koumoul du e-barzh an oabl, diassur an amzer-da-zont ewid hon bro... Digresket eo a galz al labour a vez roet d'ober da vicherourien Lannuon : en LTT eh achu ar

sizhunwezh-labour d'ar yaou da nos ewid an tri-c'hard eus al labourerien, hag e vez digresket ar pae iwe ; treutoc'h-a-se e vez ar soubenn... Derc'hel a raer dalc'h-mad da zilojañ an teritour...

Paotr Binig

**CAFÉ DES MOUETTES
TAVARN AR SKREWED**
Guinness diwar ar waekeres
Porzh a goñvers
BREST
Tél. 44.33.21

PLANEDENN UR BREIZHAD...

Herri R. a oa er skol ganin, ouzhpenn tregont vloaz so. E familh : tud vihan, paour memes, gant pewar krouadur da vogañ, gant neboud a dra. Ar vamm — m' henn laka — a gare he banig... Ewid derc'hel douzh ar viser a-vremañ marteze, ha douzh ar poaniloù da-zont.

E skol, o l ne labour Herri na gwelloc'h na falloc'h ewidomp. Evidomp-ni ne gompren ket re, sur awalc'h, ar pezh a zraihne deomp ar mestr-skol e galleg. Petra 'oa ewit'oh ar skol, nemed amzer gallet da c'hortos dant bras, da c'hortos mare ar frankis ? Ul lec'h da vezañ kuitañ ar buannañ 'r gwellañ, evel an tad gwechall, hag an tad-kozh gwechall-gozh.


Paket gantañ e santifikad, setu Herri kuit. Evel kalz re all. Da « navigañ », huñvre paotred o chom war bord ar mor. Ar frankis, bar fin : ar porzhioù-mor, an tamm

argant er chokad, ar merched, ha me oar ! Ar vuhez, boull'nurun !

Hag ar maro... Gwelad a raen anezañ ur wech an amzer, pe zeus d'ar vro e « permission », mod an traoù gantañ ewidont (pe a lavarte ar c'hoatrel eus e vuhez e-hunan ?). Dimzet. Savet un ti newez gantañ. E-giz ar re all. Gwelat 'n'ho anezañ c'hoazh wartra Nedeleg, arpag dezant mont da Vigo da « ombarkañ », war vourzh ar BÉTELGEUSE (Toni-CFN).

Euhaz goude e oa maro Herri. Dewet, pe heñvel a dommoù er mor. Piv 'oa ? Ewel pemp Breton all warnont... Buhez ha maro ur mardolod merket e blanedenn dezant daou-ugent vloaz so, en ur zont war an tamm douar-mañ, en ur familh baour, un tu bemeg e Breizh.

Y. Gwiltou



En em gavoud a reomp 'ta dirag ur savadur bras tre, karri hag all, ur bern foenn diouzh un tu, ur bern kolo (pious) diouzh an tu all. E-kreis, bodet en-dro d'ur pallenn ledet war an douar, aszet, gourvezet, ugent pe dregont a batrioted yaou-ank o selour ar skel gwraet dezo gant ur soudard Saos. Pa lavaras ar pennrener dezan : « Sav da benn ! Anavad a res da zaoz gennvad ? », diouzhu en em lakomp d'en em bokad an eil d'egile : « Jean Bernard ! Te eo hor salver ! » eme Alan.

Kemeret edomp e-gis daou spier. Ar chef, ar c'habiten Marat eus e hanw-bresel, a stagas da c'hoarzhin : « Braw deoc'h eo en em gavet en deizioù-mañ ar c'hoanant Bernard, newez-dilestret eus ur c'harr-nij, o tont eus a Vro-Saos ewid hor sikour. Mad, ewid merkañ hoc'h emgavdegezh, ez an da bacañ deoc'h, rompas ar champagne, pegow n'hom eus ket, mes ur hanne gwin ruz boutin, ha kenindall d'an oll stourmerien : Bewet ar stourm... beteg an trec'h ! »

Tremenet 'oa an hanternos hag edomp ataw o roñ kelier eus ar vro, eus gwreg ha bugale Jean Bernard, Alan a wele anezo bemdez. Tri bloaz a oa abaoe ma'n doa kuitat ar vro. Kenel skolaj da va breur, Albert Le Deunff, evelañ e Bro-Saos, n'o doa ket en em weled : unan a oa « kommando », egile « 2 DB ».

Kommandant da gelaouenn
c'hallec an UDB

Le Peuple Breton (service abonnements *)

BP 304 - 29273 BREST-CEDEX

Hanw hag hanw-badez

Chomlec'h

a gass e gomanant
Boutin : 40 L (1)
Skoz : 60 L (1)
Estrenvro : 50 L (1)
(1) Diwek ar gelaouenn da servijerij ket

Amañ an arc'hant
dre c'hakenn-bost (1)
dre vandat-lizher (1)
dre c'hakenn-vank (1)
CCP RENNES 2365-76

* mention à préciser absolument

DAOU STOURMER BREIZHAD FTP

Pegen plijus labourad gant tud kaloneg, leun a youl vad, prest da ober kement ha c'houllener diganto.

N'omp ket chomet pell dilabour. Wardro kreisteiz e tegouezas, war ur marc'h-lan, ur plac'h yaouank, Renea, kouraterez ar stourm, da zegas ur c'hloz d'ar c'habiten, ha d'ar c'hoanant Bernard.

Ha kerent ! A-benn ur c'hardeur e rank an oll bezañ prest da loc'h. Arabad laosker netra war hol lerc'h : na dilhad kozh na paper : tud an tiegezh a c'hellfe kaoud diesamant !

« — Te, Daniel, a lavaras din ar c'habiten Marat, kerzh raktal, gant da strollad, en araog d'ar pont a weles ase war hent Kemper. Mired a rankes ouzh ar Boched a dostad ouzh ar pont, epad ma vo ar gompagnunezh o tec'hed. Klevet hom eus emaoimp da vezañ arsailet. Kerzh, ha gra ewid ar gwellañ ! »

Teir lodenn a ran eus va bagad. Ur strollad, gant ur fusuil-mitrailh, kuzhet mad, a die tennañ kerent ha ma wel tra pe dra, karr-boutin-samm hag all, o tifoñañ eus ar c'horn-pleg, daou-c'hant metrad ahann.

An eil strollad, gant ur fusuil-mitrailh ive, a denno a-dreus d'an hent kerent ha ma vezo achu gant an trede strollad teuler o greadur war ar c'hiri-lan.

An trede strollad, m'emaon ennañ, zo harp ouzh an hent, kuzhet gant ur c'hleuz hag ur c'harzh lann, wardro daou-ugent pe hanter-kant metrad diouzh ar c'horn-pleg.

Pemp-ha-peg, muioc'h a-wechoù, en ur ober ur redadenn, e tremenas war ar pont oll soudarded ar gompagnunezh, pa zeuas ur patriot yaouank, eus perzh ar c'habiten Marat, da zegas din an urzh-mañ : mont d'e heul gant va bagad. Eiv zo karget da va heñchañ, ha da zibab al lec'h m'emaomp d'en em gavoud assambles.

Eus ar c'horn'e eo ar paotr : anavad a ra an oll heñchoù treus.

N'eus nemed un dra na bij ket kalz din : ne lavar ket, pa ran ar goullenn digantañ, na da belec'h ez omp, na war pessor parres e tremenomp.

An oll batrioted eus ar gwizet ar perag Diwezatoe'h ! In eus gouzeter ar perag Morillon, mestr-labour war heñchoù Misticin, araog bezañ deuet da vezañ penn-rener war « maquis » Sant-Tos.

An oll batrioted eus ar stourm a oa genidig eus ar barres, pe eus ar parrestioù tostañ : en em anavad mad a raent.

An arvar gwashañ ewid ur bagad-stourm eo kemer en e greis paotred degasset ewid o gwerzhañ d'ar Boched gant misticinad Hélan hag all. Setu ni, va c'henel Alan ha me, o vezañ ma edomp anoudegezh da Jean Bernard, e oa lakaet daou zen sur eus ar bagad da ewezhiañ abanomp, kammed-ha-kammed, roet dezo aotre, urzh d'hor lazhan war gweljet abanomp o klask ober reitouriezh.

D'an ampoent e oa buhez paotred ar c'hardur vubez e'harw : ne c'hellent kaoud fiziad e den diavaes d'ar bagad.

Ewid bewañ e rankemp mont da alusen-

niñ d'an atañchoù : n'hor boa ket arc'hant ewid paeañ. E gwirionez, n'hor bese ket kalz a hoan ewid kavoud tud kaloneg ! A galon vad pe a galon fall, kentoc'h ewid gwelad ananomp o lazezh, hor bese patates, kig-moc'h sail, bara (krampouezh, pa na vese ket a vara, rag memes war ar maes ne vese ket a vara bemdez). Ar c'hig a vese roet deomp en kriz peurliesañ. Setu unan abanomp en em lakae da geginer.

Soñj mad in eus dreistoll eus ma c'henel « Kalfeter », genidig eus Donar-nenes, bet lazhet diwezatoe'h wardro Plovez-ar-Faou. Hennezh a oa un den a vor, bet pesketaer a-viskoazh, kroget yaouank tre war ar vicher e-gis keginer war ur vag. Ur paotr laouen, jenil, hegarañ... Doue d'e bardono ! Gwellet mad gant an oll vrec'hed e lec'h ma em gavemp.

Barzh ar pod-houarn a ya da boazhañ boued d'an anevaled (eus pelec'h e teue ?), gwalc'het mad, kemenn, en doa gwraet iz deomp, gant laezh. Pebezh burzhid ! Leizh e c'henod e c'hoarzhio e weled pegen soudezh edomp oll.

Ne vese ket bemdez e-gis-se : alies e rae trous kleus sac'h ar boued.

Den n'en doa aotre da vont eus e benn e-hunan da glask boued e ti pe di : penn-rener ar strollad nemedken, abalamour da roñ ur fakiouenn, sinet gantañ, deus ar pezh a vese roet deomp. Ne gredan ket e vije bet chomet fakturenn ebet da bacañ war hol lerc'h. Goude ar bresel, p'eo bet deuet ar peuc'h, eo bet reizhet an oll draoù-se.

Distroñ a rin diwezatoe'h war ar goullenn-se : bewañ an dud !

Va c'henel Alan, hag e chomis eizh dewezh heb e weled, a oa bet roet ar garg-se dezan.

Dre troomp 'ta gant va bagad.

Karget edomp, ur wech trevez eo ar paotr gant an oll « batrioted » — (hennezh eo ar ber implijet gant tud an atañchoù ewid paotred ar strouezh) — da heuliañ ar bras eus ar gompagnunezh ha d'he difenn diouzh red, rag ne oa ket ar armao gant al lodenn vrasañ eus ar batrioted.

A-vec'h deomp bezañ en em gavet pemp kant metrad diouzh an hent, ma klevomp trous an otomitrailhesed, ar c'hiri-samm o tont diwar hent Kemper. Gwelad a raomp ar soudarded bech o tiskenn war an hent ewid en em brientiñ da gelc'had ar gelaouenn edomp, o paoues kuitad.

N'ouson gwall vad pessor fallagriañ a reas ar Boched da dud ar gelaouenn, mes un dra zo sur, fuloret kenañ edont da vezañ gwraet tro wena.

Bale a respomp epad an nos, a-dreus koadoù bras e touezh gwex uhel, lanneer, balan, brug, sirioezh... savet, diskennet, menezier..., pignet, kouezet e toullou mengleuz, karget a zour hor borchou er prajou, lamm dreis gwazhiou-dour...

Pa oa an deiz o tarzhad, gwraet ganemp ugent pe pemp kilometrad war-bugent, skuzh-marw ha raoueg, eh en em gavomp dirag un tamm ti bilan, tel tre, lochoù toet gant balan stag doutañ.



Gannet

Roñ a ran eia e dro ward da beb heni, ha kelenn war ar pezh eo o labour. Ewid un den o tont en e hunan : « Chom a sav !... Ar ger ? » En deiz eo : « France d'abord ». En nos e vo : « Tori e benn ». Ma ne ro respont ebet goude teir gwec'h, tan dezañ !

En nos e vo daou ward, gant an na grogfe ar c'hoant-koukved 'barzh heni pe heni. Bremañ, setu ar gentel diwezañ : « Mont a rin e-kreis an nos ewid gwelad hag ober a roe'h ho tever. Beuz war tan dezañ ! »

En nos e vo daou ward, gant an na grogfe ar c'hoant-koukved 'barzh heni pe heni. Bremañ, setu ar gentel diwezañ : « Mont a rin e-kreis an nos ewid gwelad hag ober a roe'h ho tever. Beuz war tan dezañ ! »

En nos e vo daou ward, gant an na grogfe ar c'hoant-koukved 'barzh heni pe heni. Bremañ, setu ar gentel diwezañ : « Mont a rin e-kreis an nos ewid gwelad hag ober a roe'h ho tever. Beuz war tan dezañ ! »

En nos e vo daou ward, gant an na grogfe ar c'hoant-koukved 'barzh heni pe heni. Bremañ, setu ar gentel diwezañ : « Mont a rin e-kreis an nos ewid gwelad hag ober a roe'h ho tever. Beuz war tan dezañ ! »

En nos e vo daou ward, gant an na grogfe ar c'hoant-koukved 'barzh heni pe heni. Bremañ, setu ar gentel diwezañ : « Mont a rin e-kreis an nos ewid gwelad hag ober a roe'h ho tever. Beuz war tan dezañ ! »

En nos e vo daou ward, gant an na grogfe ar c'hoant-koukved 'barzh heni pe heni. Bremañ, setu ar gentel diwezañ : « Mont a rin e-kreis an nos ewid gwelad hag ober a roe'h ho tever. Beuz war tan dezañ ! »

En nos e vo daou ward, gant an na grogfe ar c'hoant-koukved 'barzh heni pe heni. Bremañ, setu ar gentel diwezañ : « Mont a rin e-kreis an nos ewid gwelad hag ober a roe'h ho tever. Beuz war tan dezañ ! »

En nos e vo daou ward, gant an na grogfe ar c'hoant-koukved 'barzh heni pe heni. Bremañ, setu ar gentel diwezañ : « Mont a rin e-kreis an nos ewid gwelad hag ober a roe'h ho tever. Beuz war tan dezañ ! »

En nos e vo daou ward, gant an na grogfe ar c'hoant-koukved 'barzh heni pe heni. Bremañ, setu ar gentel diwezañ : « Mont a rin e-kreis an nos ewid gwelad hag ober a roe'h ho tever. Beuz war tan dezañ ! »

En nos e vo daou ward, gant an na grogfe ar c'hoant-koukved 'barzh heni pe heni. Bremañ, setu ar gentel diwezañ : « Mont a rin e-kreis an nos ewid gwelad hag ober a roe'h ho tever. Beuz war tan dezañ ! »

En nos e vo daou ward, gant an na grogfe ar c'hoant-koukved 'barzh heni pe heni. Bremañ, setu ar gentel diwezañ : « Mont a rin e-kreis an nos ewid gwelad hag ober a roe'h ho tever. Beuz war tan dezañ ! »

En nos e vo daou ward, gant an na grogfe ar c'hoant-koukved 'barzh heni pe heni. Bremañ, setu ar gentel diwezañ : « Mont a rin e-kreis an nos ewid gwelad hag ober a roe'h ho tever. Beuz war tan dezañ ! »

En nos e vo daou ward, gant an na grogfe ar c'hoant-koukved 'barzh heni pe heni. Bremañ, setu ar gentel diwezañ : « Mont a rin e-kreis an nos ewid gwelad hag ober a roe'h ho tever. Beuz war tan dezañ ! »

En nos e vo daou ward, gant an na grogfe ar c'hoant-koukved 'barzh heni pe heni. Bremañ, setu ar gentel diwezañ : « Mont a rin e-kreis an nos ewid gwelad hag ober a roe'h ho tever. Beuz war tan dezañ ! »

En nos e vo daou ward, gant an na grogfe ar c'hoant-koukved 'barzh heni pe heni. Bremañ, setu ar gentel diwezañ : « Mont a rin e-kreis an nos ewid gwelad hag ober a roe'h ho tever. Beuz war tan dezañ ! »

En nos e vo daou ward, gant an na grogfe ar c'hoant-koukved 'barzh heni pe heni. Bremañ, setu ar gentel diwezañ : « Mont a rin e-kreis an nos ewid gwelad hag ober a roe'h ho tever. Beuz war tan dezañ ! »

En nos e vo daou ward, gant an na grogfe ar c'hoant-koukved 'barzh heni pe heni. Bremañ, setu ar gentel diwezañ : « Mont a rin e-kreis an nos ewid gwelad hag ober a roe'h ho tever. Beuz war tan dezañ ! »

En nos e vo daou ward, gant an na grogfe ar c'hoant-koukved 'barzh heni pe heni. Bremañ, setu ar gentel diwezañ : « Mont a rin e-kreis an nos ewid gwelad hag ober a roe'h ho tever. Beuz war tan dezañ ! »

En nos e vo daou ward, gant an na grogfe ar c'hoant-koukved 'barzh heni pe heni. Bremañ, setu ar gentel diwezañ : « Mont a rin e-kreis an nos ewid gwelad hag ober a roe'h ho tever. Beuz war tan dezañ ! »

En nos e vo daou ward, gant an na grogfe ar c'hoant-koukved 'barzh heni pe heni. Bremañ, setu ar gentel diwezañ : « Mont a rin e-kreis an nos ewid gwelad hag ober a roe'h ho tever. Beuz war tan dezañ ! »

En nos e vo daou ward, gant an na grogfe ar c'hoant-koukved 'barzh heni pe heni. Bremañ, setu ar gentel diwezañ : « Mont a rin e-kreis an nos ewid gwelad hag ober a roe'h ho tever. Beuz war tan dezañ ! »

Paperenn ewid goullenn mont e-barzh UDB

Hanw hag hanw-badez

Chomlec'h

Goullenn a ran moned a-barzh UDB

D'an (d'ar)

Sin

Da gass an-dre
troc'h-het pa adskrivij da
UDB P. 304 - 29273 BREST-CEDEX

PARTIDO SOCIALISTA DE ANDALUCIA



PAIS ANDALUZ

D'an 12, 13 ha 14 a vis Genver eo bet dalc'het e Sevilla al Kendalc'h Strallad Sokialour Andalous, ar PSA (Partido Socialista de Andalucía).

Abaoe m'eo bet sammet ar c'hozh Franco kazi gant an Andou, ha deus ar Stad spagnol gwret kummedoù bras war raog, hag ez eo deuet an demokratiezh da vezañ un dra wirion, bew ha nerzh du-hont... Demokratiezh vourc'his marteze, med demokratiezh nemestra. Gwelloc'h eo evlaket euid an diatoriezh.

N'ema ket e-du an oll strolladoù politikel a Vro-Spagn gant ar pezh a genig gouarnamant Suarez. Dre ma kav dehe n'eo ket trawalc'h. Ansew a ra skrid-diasaz Bro-Spagn ez eo gwraet ar Stad spagnol gant pobloù Bro-Spagn. Lennet med ha peus : pobloù. Pell, pell emma gouarnamant ar Frañs eus an anvadenn sort-se ! Emma ar pobloù gant ar Frañs euid pezh a sell an dilentez, an abeurtezh, an ideologiezh a nac'hañ ar fedoù : euid Giscard, Mitterand, Chirac, Mazarin, n'eus hano, ne vez hano dalc'hmed nemed eus pobl ar Frañs ; pe 'z eus an Egrazon, evel e Spagn, meur a pobl, hag an e mek, pobl ar Vretoned...

Setu ez eus ur bern broioù e Spagn o klask tapout an emrenerezh, o emrenerezh wirion, ha n'eo ket an hant a genig Suarez, a sabant goulo, pe d'an nebeutañ kuzh re zister, d'ar strolladoù emrenour e gaver du-hont. Hag ez eus e-leiz ane. En Euskadi ez aont eus an tu dehoù pellañ d'an tu kleiz pellañ...

Red eo larec un dra : pe 'z eus ar meos eus ar Frañs, ha pe garter eus an emrenerezh, a kaver an dra-se reizh, normal, red ha tonket d'en em gavout dezic pe zeiz. N'eus nemed jakubined ar Frañs (eus Marchais da Songuetti) a gemet a vez faoket gant an emrenerezh, pe 'z eus hanoù koulkoude ur pasetenn ouzhpenn e-barzh an demokratiezh...

Padet e oa bet an UDB da gemer perzh e 21 Kendalc'h ar PSA... Souzhet e chomet pe ruer amoudeg gant ar strollad-se, savet tri bloaz zo heñvel, bodet ennañ 10 000 a emsaverien, euid ur vro, Andalousia, poblet die wech evel Breizh. 500 a gendalc'hidi bodet e Sevilla, se zo un dra benneg... Emrenour eo ar PSA, ha sokialour war ar nemestra... Dre c'hais ewitañ,

ez eo ar PSA ar strollad emrenour nemetañ an Andalousia.

Pobl an Andalous eo sabant hanoù bew ha birwidig hec'h emskiant vroed. Spagnoleg a gomzont, gant ur poues-mouez heverk tra, roudoù ennañ moarvad eus an arabeg. Arabad ankouet ez eo bet Andalousia un vro arab betek 1492, ma voe distaret gant ar roueod « katolik » ar rouantelezh enni keriou brudet evel Kordoba, Granada, Sevilla ha Cadix. An oll a our ez eus eus Alhambra Granada hag eus Alcazar Sevilla savadurioù int eus ar re givrañ e still arab. Epad eizh kantved eo bet Andalousia ur vro arab, ha n'eo deuet da vezañ « spagnol » nemed 500 vloaz zo ha nebeutañ. Bez e c'heller komz heb larec goau eus ar bobl andalous.

Stank tra eo an darempredoù etre ar PSA hag ar strolladoù arakour eus ar broioù arab : OLP, Boos, FLN (Aljeria), FSP (Marok)... Anaveat eo ar PSA en Irak, e Libia, hag un drugar eo bet euid dileuriad an UDB e Kendalc'h ar PSA skoulmañ darempredoù gant dileuridi ar strolladoù arab-se.

A-viskoc'h eo bet an Andaloused unan eus pouarnañ tud a gaver e Spagn, lec'h int stank koulkoude. Emma an dilabour o'ch ober e reus an Andalousia iwe. Mes muioc'h c'hoazh an divroañ : tremas Katalonia pinwidig hag industrialiet e kerzh paeur-keazh tud Andalousia... Ur gudenn na vo diskoulmet nemed gant an emrenerezh sokialour. Eveljust ne c'halla ket an Andaloused euid ar c'hapitalism o hunan. Pae muioc'h euid ar Vretoned. An oll bobloù sujet d'ar Stadoù kapitalist, emma red dehe an unanñ : broioù galloud ar Stadoù, diskar mistri an arc'han, daou dra d'ober war ar nemes tra. Ar Stad vourc'his, marteze an arc'han bras, ne c'hell nemed gwaskañ al labourerien, ha re ar pobloù paeur a rank tapout a sae'h ha mont lew. Evelso emma kont gant ar Vretoned, an Andaloused, gant e-leiz a Arabed iwe. Ar Stadoù bourc'his n'int nemed binvioù o lakoad efedusoc'h ar c'hapitalism. Koss d'an traoñ nerzh ha galloud an arc'han, distraj luskodan an imperialism, roññ ar frankis hag an emrenerezh d'al labourerien evel tud hag euid pobloù, setu eus ur program na vo ket tizhet warc'hoazh. Kameromp gant an hent ewlaket...


NEDELEG

Kermarrec, pe : M'arrec pe hanw person Bodilis, ur barres a Vro-Leon, damdost da Landivisio. War douarod Bodilis emma « base » ar marin, ur mell pezh tachenenn ma kaver warni kirri-nij hag ur bern kardioid aparchantet gant ar marin a vresel. Bodilis, unan eus ar c'hant lakad hag ouzhpenn, krignet gant krig-bew an arme e Breizh...

Eus ilis k'ar Bodilis eo ez eo bet skingaset gant an tele oferenñ-bred unneg eur da zeiz Nedeleg. Euid katoliked an Europ kapitalist a-bezh. Hag euid re a Pologon komunist iwe marteze. Sañset, oferen ar Pelligent eo a oa da vezañ skingaset, mes, gant ar Pab newez lakad e karg, e oa bet kavet « dereatoc'h » skingass an traoù eus ilis-veur Sant-Pêr e Rom, ma oa ar Pab Woytyla oc'h oferenañ.

Amma neuse eo ez eus hanw eus person Bodilis. An tamm aotrou-mañ ne felle ket dehañ e vije gwraet gant ar brezhoneg, nemed war-boues ur c'hantik bennag. Ne felle ket dehañ kaoud « an oferenñ otomunist ». Braw, Neuse ez eus e-leiz a otomunist war an douar, rag, heb sul, ma no ouie'h ket, e vez larec diw oferenñ, unan war ar radio, eben war an tele, gant otomunist ar Frañs, peogwir e vez an traoù e galleg. War ar radio, da zeiz Nedeleg da zeg eur, eo an oferenñ otomunist all, skinet eus ilis Mourig, e Bro-Gwened, e-lec'h m'eo stank spontus an otomunist, sur, peogwir e oa peb tra e brezhoneg. Bloaz zo e oa bet skinet oferenñ ar Pelligent eus un ilisig a gaver e kreisig-kreis ar Vro Vask (Euskadi-Norzh) : eno iwe e s'plet an otomunist daonet, peogwir e oa an oferenñ en euskareg penn-da-benn.

Euid an asen gorneg a zo e penn parres Bodilis, ez eus eta etre 400 000 ha 500 000 a otomunist e Breizh, brezhoneg ganto bennez, heb ober ar gont eus an otomunist-kuzh a our brezhoneg, daoust ma n'o devez ket tra, pe c'hoant, d'ober gantañ. Nag heb ober ar gont eus ar re a garfe ober gantañ, mes n'ousont ket tamm brezhoneg ebed... An dra-se a ra en tu all



E BODILIS

da 1 000 000 a otomunist e Breizh : sav ma vefe gwir !

Ma 'n dije larec c'hoazh ar c'hozh person a zo eno : « N'eo ket k'ar ar brezhoneg yezh ar vro, n'eo nemed heni re gozh ar vro », e vije bet tu da argusenñ marteze. Daoust ma n'eo ket kalz stankoc'h ar re a ra gant ar brezhoneg e Mourig moarvad, eged nad int e Bodilis...

Ma 'z eus bet un tamm brezhoneg ben-nag nemestra an oferenñ-se, n'eo ket a-drugarez d'ar person. Tud ar vro, e barresians, n'int ket tud da vezañ spontet gant ar brezhoneg : unan aneche a oa deuet d'ober ul lennadenn e brezhoneg, hag eskob Kemper, a oa oc'h oferenañ, ewitañ da vezañ eus Breizh-Uhel, a zistagas un nebeud frasennoù brezhoneg e fin e sarmon.

Ne vo ket lakad person Bodilis da v'ar marc'heg a enor ar brezhoneg. Ar velen eo a zo o larec'hañ ar brezhoneg en oferenñ Breizh-Izel. Rag, ma o deus bet gwraet ar skolarien kemadenn en o skolioù, un digarez bennag o deus bet ewlaket : dindan ar gouarnamant e oant, red dehe plegad d'o ensellerien, hag all. E-red dehe velen, ne c'heller ket roññ an absolvenn dehe : troet eo bet e brezhoneg oll destinañ ul lidehez newez, hag eskopi Kemper ez eus bet memes un eskob, an eskob Fave, e penn kouch an distroieren, hag emma an eskob-se a-du gant ar brezhoneg en ilis, mes pennoù kleiz evel person Bodilis, ha meur a heni all, eo a zo o kass ar brezhoneg d'ar vered, heb ober memes un tamm tremen dre an ilis : in-teret e vez gante euid ar c'hi...

Mezh da berson Bodilis !

Ur brud...

Setu deuet en-dro mare « Match ar pemp broad ». Ha bez' ez eus ur brud hag a red... Mad ! An houti a red o hunan iwe, neketa ?

Ur brud ? Ya ! Tud zo a lavar e vez klanv, bewech, Mikael Debre d'ar mare-mañ eus ar bloaz.

Chom a ra dilir, astennet war e wela, beteg fin ar match, kuzhet e fin gantañ dindan e ballennoù, e benn sanket don gantañ en e voned-nos, ha boullou « Quiss » gantañ en e ziviskouarn, kuit dezañ klewood komz eus « broadoù » pa vez meneg eus Bro-Skoss pe Vro-Gembre.

Ar Gwalarnour

MA OUEZIT GALLEG UN TAMM, LENNIT IWE « LE PEUPLE BRETON »

Kentelioù...



Grenn

Alies e teu soñjal eo dever kentañ ur stourmer en em galetaed. Anes da se n'eo ket gouest da badoud na da vont war raog. Poent-tou diaes, frapadoù c'hwerw a vez e kement stourm, ha gant unan anezo emamp bremañ. Pilet m'eo bet re an tu kleiz diwar nebeud, petra 'chom ganeomp e-gis spi euid traoù zo ?

Diseblant eo peb brassañ ar Vretoned : d'ober petra stourm euid tud ne raont fourz forzh a-benn ar fin ? Diefedus hon stourm alies : ha perag kemadenn al c'hwerwoni hag a gassoni etre emsaverien ? War washad ez a diskar hon ekonomiezh : med perag stourm ha petra d'ober, pa welomp peb unan chalet gent e damm bara e hunan hebken. Mad eo d'ar re a sav moc'h sevel a-eneb da Paris, med en un doare korporatist eo dezo henn ober alies : tud e-gis Alfoñs « C'hoarzh Glas » Arzel, president kamp labour-douar Penn-Ar-Bed, a gendalc'ho da vatif « Mad » goude lavaret kreñv bezañ a-eneb. Tud Ploiger, kerkent hag ez eus bet hanw da gass « o » sañtral da Blogoñv zo distroet d'ar gêr ar peb brassañ anezo : N'oa ket o ofer ken. Ar yezh a vont da gall bennez muioc'h mui, ha kêr o deus heniennoc'h huchal, gouzoud a ra tud ar Penn Bazh ne ra forzh ar peb brassañ. Troet eo da netra pe dostig promessaou ar Chistr-Treñk,

e-skooz petra 'oa arrog ar votadegoù euid pezh a sell kelenn ar yezh.

Padal, e oar peb heni e ra o roud tamm-ha-tamm han mennoioù, med hir ha rust eo an hent, ha fallgoloññ a raio meur a heni c'hoazh. Ken kreñv e tiskouez an enebour bezañ, ha divroñ. Bremañ, n'eo netra dezo roññ pemzeg bloawezh toullbac'h da bootred ar poult-tarzh. Pemzeg bloawezh, tudou, an eil dewezh warlerc'h egile... Kêr zo nompas soñjal, e tegass an distroañ gwellaenn doareoù zo... « Savailh : pemzeg bloawezh, Porsal, ped ? », a c'houlenn mogerioù zo e Breizh. Hag eus an tu oll e vez gouezet doareoù kuzh polised dre-zindan ar c'houarnamant. Tud an tu dehoù a toullañ, o vuntrouñ awechoù, a rogañ ar babl e mil fesson, ha c'hoazh oc'h ober goap eus an oll. Ra aes e vezont didamallet gant ur justiss na vez, alies mat, nemed heni ar renkad emma ar str eurt eo daouarn... N'eo ket inf-i a yelo da louedñ en ur prison epad 15 bloawezh. Hag evel boas n'en deus Yann Grenn nemed ar gwir da dewel, pe neuse e oar ervad ne vo ket seladout Tud sewen ar re-hont a'n em loka da skwer deomp ? Petra 'n eus se da weled, ganto emma ar vazh, ganto ar galloud hag an arc'han, al lezennoù ha peb tra...

Pegehid e vo red d'hon c'houarnour chom e gor arrog roññ lamm da vad da sort tud, a lavar « ya » amañ, « marteze » e Roazon, ha « ya » amañ, vezont e Paris, pe ar c'hontrol-mik, diaouz a vo lavaret dezo ober. Ober goap eus genou ar re all emaint. Med, koustet a gousto, un deiz bennag Breizh a zihuno.

Ar Storioker

ARABAD
DISONJAL :
D'AR SADORN
24/2, DA 16^h
MEETING BRAS
AN UDB
EN ORIENT

Kass a ran deoc'h ma c'homantant ewid ar wech kenañ. Kavet 'm eus e oa en ho pennadoù pennadoù a dalvoudegezh, ewid pezh a sell ar mennoù a zifennit. Med bez e c'helle Pobl Vreizh bezañ kalz plijusoc'h da lenn, ma vefe gwelloc'h ar brezhoneg implijet enni. Da skwer, ken diaes-se eo skrivañ « kreisenn nukleel », e lec'h « sañtral nukleel » ? (niv. 107, p. 10). Meur a skwer all a vefe.

Spi 'm eus e c'hellin lenn brezhoneg skrivet gwelloc'h en amzer da-zont, hag e chomo plijus ar gelaouenn ewid an daou-lagad.

Chañs vad deoc'h memestra, ewid ho stourm er renk kentañ ewid Breizh.

Kerneis, Plougin

Trugarez vras d'hol lenner ewid e lizher. Ahania ! Dale'hm ad ar memes kudenn : heni ar gelaou. Doust hag eñv ez eo gwraet ur yezh gant gerioù da gentañ ? Ewid ar brezhoneg ne sav ket deomp. Lavaret e vez, ha kelennet gant pennoù bras ar brezhoneg, e leu ar gerioù brezhoneg eus ar c'heltiz kozh, eus ar romaneg, hag eus ar galleg iwe muioc'h-mui, en hon amzer. Eveljusti, pa 'z eus gerioù brezhoneg savet mad, aes da sompren, n'eo ket red ober gant gerioù « galleg ». Ma vefe kelennet ar brezhoneg a vras, ne vefe kudenn ebet, hag e c'hellfemp sevel ur bern gerioù newez, brezhoneg-rik — ar pezh ne sinif ket kelteg-rik — hag e vefent intenet kerkent. Marteze iwe e c'hellfemp ni amañ, re skipañ-skriavañ Pobl Vreizh, bezañ figusoc'h ha « glanaad » un tamm ur brezhoneg a skrivomp... Koulskoude, ewid ar gerioù « kreisenn nukleel », e sav ur gudenn. Kreisenn zo « centre » : kreisenn a enklaskoù breizh ha kelteg « Centre de recherches bretonnes et celtiques ». Mes « centrale » e galleg n'eo ket « centre ». Hervez ar Petit Robert : « centrale : usine qui produit du courant électrique ». Ma 'z eo red kreisenn « centre », ne dalvez ket « centrale ». Ma 'z eo red skarzhañ sañtral, blas ar c'hozh galleg warnañ re, ez eo red neuze kemer tredan-va ewid « centrale électrique » ha neuze lavaret tredanva nukleel ewid « centrale nucléaire ». Mes amañ e savje tud all a-eneb : « Brezhoneg chimik, gant ar vevh 's' Rag n'ema ket a-du, pell ahanne, all boarred ar brezhoneg ! »

Poaniñ a ramp da voullañ war b/Pobl Vreizh ur brezhoneg glan ha nerzhus en e frammadur. Ewidomp ez eo kudenn ar gerioù ur gudenn a eil renk. Mes, ne vern, mad en deus gwraet hol lenner a Blougin displegan e soñj. Hag e poanimp, ya, da chom er renk kentañ en hor stourm ewid Breizh.

Pobl Vreizh

Kamaraded ker,

O paoues ressew, niv. 108 Pobl Vreizh emañ, hag evel kustum 'm eus lammet warni kerkent hag arriet.

Brawoc'h-brawan e kavan ar gelaouenn, da skwer e-barzh homañ e c'heller kavout peadra da voueta ar spered : kleier war ar senevadur (Diwan), pennadoù farsus,

LIZHEROÙ



Herve Latimier hag Anna Gwenola Kervella, Landrevarzec.

Trugarez vras d'hol lenner ewid o hetou, hag e reketomp kemendall dezo.

Pob Vreizh

keleier sosial, siriusoc'h, rag duoc'h-duañ e teu an oabl da vezañ amañ e Breizh... Med ar pezh en deus plijet ar mutañ din ez eo pennadoù-skrid Y.V. An Deuñv : a-boues bras e oa lakaad an dud da c'houde ez eus bet Bretoned kar-o-bro eveltan o stourm a-eneb ar fachisted, n'eus forzh deus pessort bro e oant.

Ma c'hwekañ sours'hemennou, ha kalon vad da skipañ Pobl Vreizh, a ra kement ewid Breizh hag ar frankis dre ar sosialism.

Paolig Kombot, Montroules

G.S. Setu amañ ur chekenn a 100 L ewid ma adkomantant-skoazell.

Freadet eo bet tud ar « skipañ » o lenn ul lizher ken hegarad : bennozch ha trugarez d'hor c'homantant (thokus !) a Vontroules. Ya, freadet omp bet, ha kennerzh : hag e talc'himp da vont war raog, dale'hm ad, en desped da beb tra. Med sur omp e kavimp heb an amzer tud a galon war hon hent d'hor harpañ. Trugarez vras, ur wech ouzhpenn.

Pobl Vreizh

Setu hor c'homantant da b/Pobl Vreizh ewid 1979, gant hor gwellañ goure'hemennou da skipañ ar gelaouenn, hag hon hetou kalonekan ewid ar bloavezh-stourm newez.

Amañ e kavoc'h diw chekenn 50L ewid bezañ adkomantant da b/Pobl Vreizh ha **Le Poble Breton**.

Bloavezh mad da skipañ an diw gelaouenn, ha kalon vad ewid al labour hetou dispar a rit.

Sossig Grall, 22700 Perros



Keneiled ker,

Lennet 'm eus ho kelaouenn en hañv dwezañ-mañ. Un niverenn diwar al larvu du e oa. Dudius tre 'm eus kavet an niverenn-se. Hag e felle din komantant, pell a oa, med ankouad a raen atav siwazh, ha diaes e oa iwe (ur bruderezh heb chomlec'h a gaver war ar gelaouenn **Al Liamm**). Setu a-benn ar fin an afer-mañ kasser da benn. Kass a ran ur chekenn hanter-kant lur, gant al lizher ewid ma c'homantant-skoazell.

B. Leguy, 59830 Cysnoing

Trugarez vras d'hol lenner newez, oc'h ober e cemeronts en **North Braz ! Aman n'eo ket re domm ol ewid an deiziñ, mes du-hont eo yennoc'h kalz, diouz ma klevet ! Klask a rimp, beb mis, kass trema ur North tammig goula bewe o tont eus oled ar vro...**

Pobl Vreizh

Kenroad ker,

Kass a ran deoc'h ur chekenn-bost ewid un adkomantant-bloaz. Spi 'm eus ez ay gwelloc'h an traoù ewid Breizh ar bloaz-mañ. Gant va gwellañ hetou ewid ar bloaz newez.

Reun Ar Chalan, Wellesley College, Massachusetts, USA

Bloavezh mad deoc'h (hag iwe d'ar gelaouenn) !

Diwezañ on da adkomantant da PV (un tammig on bet leireg). Setu ur chekenn skoazell 110 lur ewid an drase. Dalc'hit mad ! Ha chañs vad d'ar gelaouenn.

Yann Aissaoui, 92160 Antony

Ur bloavezh mad a souhetomp hag iwe d'hor komantant eus Antony, hag iwe d'hor oll lennerion ha komantantion. Ha trugarez vras d'hor komantant ewid e skoazell-arc'hant.

Pobl Vreizh

Klass zo war dud kountant da intant eus stajoù brezhoneg war ar maes a vo komañt a newez da ober. Skriavañ : M. Madec, 15 rue St Gwenal 29230 Landivisio.

Ur bloavezh mad ewid Pobl Vreizh hag ewid Breizh a-bezh.

H. Guern

Kenvrois ker,

Da gentañ, bloavezh mad da b/Pobl Vreizh.

Setu ma adkomantant-skoazell ewid ar bloaz 79. Ne vo ket hir ma lizher, peogwir ne gomzant ket kalz brezhoneg c'hoazh. Deskin a ran abaoe ur bloaz nemedken. Ar wech a zeu, e vo gwelloc'hig an traoù. A greis kalon ganeoc'h, ha dreistoll kalon vad !

Padrig Cadorei, 44400 Reze/Razieg

G.S. Ma digarezit m'ho peus kavet un nebeud fasioù gant ma lizher.

Trugarez vras d'hol lenner. Ha sours'hemennou deñvañ ewid e vrezhoneg : dont a ra brav tre gantañ. Kalon vad deñvañ, da zerc'hel da vont !

Kamaraded ker,

Un tammig ez on diwezañ da adkomantant : 'vel ur genaoc'h 'm eus gortoset kresk ar pris.

Ahendall e gavan ma skodenn ewid 1979, hag e (sou)hetan bicovezh mad deoc'h toud re skipañ Pobl Vreizh, ha d'an oll kamaraded, ha sirtoud da v/Bernard Kloareg, hag en deus skrivet war ar gartenn, ha da Laorant Lintah, deus Plizim.

Bloavezh mad adarre, ha kouraj vad.
Y.B. Salaun, 91400 Orsay

Re skipañ Pobl Vreizh a souhet kemendall ili, kamarad ha komantant ker !

Pobl Vreizh

* *


*

Klass zo war dud, brezhonegerien anezo, o chom e Bro-Leon, ewid skour war dro ober ur film war skolioù Diwan. Rad 'vefe galled diouevañ un tamm amzer. Pellgomz da J.C. Bozec (Gwirpenvel) : 07.91.63.

levr di breizheg
(bandennou treset - pladennoù)

An "Ti Korn"

Alain LE FALHER
22 rue Brulat - Brest ☎ 80.36.50



PIOKA
brun-du e liw
(glas a wech-holl dre an heol
etro 7 sant-met beteg 15.

FARZ PIOKA

Kentañ tra da gaout eo pioka (« Chondrus Crispus » e galleg). Hemañ 's zo ur ouenn vezhin bihan a vez kutuilhet pa vez reverzioù. War garrig an isel-voe eo e vezont kavet, mesket alles gant ur seurt all a zo kar dezo hag a zo « lin » o hanw tan daou hanw-mañ eo ar re a implijant-me, med meur a hanw all a zo. herwez al lec'hioù). Pa vez distumet un eostad pioka, e vezont lakaet da sac'hañ, rag chom mad e-pad ur pennad braw a reont. N'eo ket daw klask o lakaad da wennañ e doare abod (gwraet e vese kentoc'h, pa vesent gwerzhed da vont d'an usmoù).

Da fardañ farz pioka, ez eus defod traoù all : un ivinad holen, laezh, ur vi hag un tammig sukr. Kemendall a zo iwe, med n'eo ket gwall ressis e gwirionez. E Bro-Skoss, e-lec'h ma 'm eus desket aosañ ar meus-mañ, e vese gwraet dre vras ar gont eus pezh a vese lakaet.

Da gentañ, eo red lakaad un tamm pioka lakomp un eizh bodenn bannag ewid un dent da souañ en dour e-pad passe un hanter eur-wazh. Goude-se, e vezont plantet e-barzh al laezh (lakomp un hanter litrad ewid kaoud ur volennad farz), assamblez gant un ivinad holen, ha tan dindan, nemed leel, da zegas da verwin a-nebeudou. Ne gredan ket e vefe daw tabañ gant ul loa, dre ma vez gwraet, nemed ar fin toud pa deufe da gennañ ar foza. P'ema o verwin, e vez iselaet an tan c'hoazh, ha leset ar gastolerevad da dompañ doussig tre, e-pad un ugent munud bennag pe-se. A-nebeudou e teu al laezh da bouc'hañ un disterrañ. Da c'hadal, e vez gwraet traoù all hag en o mask tenn ur vi ha kemmeskañ mad ar gwenn hag ar meien.

Pa gav deoc'h eo krog al laezh da bouc'hañ da vad (postament pa 'maoc'h emu skourz o c'hoañ), e pellaoc'h ar gastolerevad diouz an tan, amzer deoc'h da lakaad sukr e-barzh (lakomp ul loadad vat) hag ar vi. Ha kemmeskañ, troug adarre. Lakaad war an tan a newez, tuan ha buan ar dro-mañ, an ur dabahañ un tamm, ha just p'ema o vont da verwin lazhañ an tan. Berrañ ne chom ken lakaad ar farz en ur volenn pe ur plad, dezañ da yehaad ha da beus-soladaet. Ha p'eo gwraet, plantit e-barzh ha daw. Boued lipous yac'hus ha... kelleg.

Ur skingev eo se aus ar pezh a zo tu da zaskañ a broioù all. E Breizh iwe a vese gwraet med n'eo pa kavet do ar abed da vevañ peb tra din. Yac'had deoc'h!

Mikael Madeg

Galloud ar wash...

Pell zo o deus komprenet ar pennoù bras pegeñ bras, pegeñ kreñv, pegeñ galloudeg eo poues ar wash... Ar journalioù, ar radio, an tele : boud mestr ar ar benweger-se zo boud mestr ar spered an dud. Ur gouarnant bourc'his imperialist ha kapitalist a venn, e-raog peb tra, boud mestr ar an doereioù. Hag e welomp a-c'houde gwerso mistri ar wash é kerzhed dorn-ha-dorn ged re ar gouarnant bourc'his a-vremañ, peogwir emaint, an eil re hag ar re' rall, ec'h ober ar mem jeu : gouarn sparlet speredoù an dud, ha o zroñ el ma karont...

Ged afer ar Loren ema daet an traoù da vout splannoc'h c'hoazh... Ase e weler penaos e c'hell paotred ar wash lakaad an dud da soñjal ar pezh a vennont, int, hag e vezomp kasset-degasset, lakaad da ouied traoù zo, ha pas traoù arall : memes mod e vez gwraet genimp el ma vez gwraet ged ur grampouezhenn chañchet tu dehi ar billig.

Gwir eo ema poanius an traoù er Loren. Ha n'eo ket ni, sossialisted hag etrevroadelourion, hag a lâro n'omp ket nec'het ged kudennoù ar Loren. Mes, mall bras eo gwled e vez gwraet espress-kàer doc'h hon lakaad da skuilh dâeroù ar ar Loren, na boud hon eus ni iwe e-leizh a gudennoù ken gwazh ha gwashoc'h el re ar Loren.

Komzet 'vez ag an enkadenn (crise) an industri. Hama ! Amañ en hon bro

Breizh n'eus ket a enkadenn, peogwir n'eus ket a industrioù... Braw eo komz a 30 000 a dud lissañsiet, peogwir ema an doere-se unan hag a sko er penn. Hag e tegass ar wash ar splannijenn ar gement-se, peogwir e c'hell an doere-se boueta mekanik ar wash braw tre, hag ober berzh bras emesk an dud. Mes, pa vez, deiz-ha-deiz, tamm-ha-tamm, lissañsiet deg gwezh tri-c'hant den e Breizh, kement-se ne ra ket trous, kement-se n'eo ket interessant ewid mistri ar wash. Ha neoazh, kalz gwashoc'h ema stad an traoù e Breizh, hag a-c'houde pell zo, ewid nad int er Loren. Ema an elektronik e Breizh en ur stad fall tre : komz a raer a lemel ur bochad plassoù-labour en usinoù Lannuon, Brest, Roazon... Pa gomzer ag ar rapariñ-bagoù, ne vez kistion amaed a d/Terrain e Marseilh, ha neoazh eh eus eno pemp batimant bras àrnugent é c'hortos boud raparet, ha p'ema an traoù en o fallañ ged ar mem labour rapariñ-bagoù e Brest. Ped ha ped stal vihan é voned d'an dias, didrous, e Breizh ? Ekonomiezh Kreis-Breizh oaet da netra, pe dost, heni Bro-Kernew é voned ar fallaad bemdez...

Kàer eo komz a « solidarité nationale »... Ur wezh c'hoazh eh omp unanet dorn-ha-dorn ged micherourion al Loren. Mes Breizh, Bro-Korsika o deus iwe o c'hudennoù. Ha genimp-ni n'eus « solidarité nationale » ebed. Breizh n'eo ket in-

teressant ewid ar mass-media, namaed a pa vez an FLB é lakaad an traoù da strakal, namaed a pa vez folklor e Gouelioù Meur Kernew...

Galloud ar wash, unan bras, hag a... wash ar hor pennoù bemdez. Galloud ar wash 'a oui « ankouaad » bemdez komz a gudennoù ar Vretoned. Interessantoc'h eo komz ag ar C'hamputchea, ag an Ayatollah C'homeini, pe a c'hlaç'har Farah Diba... Gwir eo n'eus el Loren na FLB nag ur yezh war he zremenvan. Ar re baour, ar broioù paour ha dileset a vez leset da greviñ. Ged bennoz ar mass-media, bouzar ha mud ar hon divoud.

Peb unan a bennoù bras politikezh ar Frañs en deus e c'her da lâred a-zivoud ar Loren. Oaet eo Mitterrand e-hunan da weled Lorenis ; ne vez ket gwelet gwall lies dre amañ, namaed a pa vez red klask mouezhioù.

Ewid lâred ar wironez, ne c'hellomp fizioud namaed ennomp ni hon unan. Boud libr zo petra ? Boud distag a-zoc'h kement mestr a zo, a-zoc'h kement re hag a venn gouied gwell e'idomp ar pezh a zo mad e'idomp, doc'h hon lakaad da blegiñ dehe. Boud distag eta a-zoc'h mistri ar wash, ha gouied an doereioù hag ar wironez a venner gouarn kuzhet doc'homp. Boud libr zo brewiñ galloud ar wash, hag huchal d'ar bed a-bezh eh eus ahanomp ha ne vennomp ket kreviñ.



An dachenn-mañ n'eo ket hañval doc'h un usin ag ar vro Loren... Ha neoazh, ped tachenn zo èlse en hor bro ? Ped ha ped labourer-douar o deus kollet o labour a-c'houde 10 vlé so ?